

348

Pempet Gouaperez flemmus an Autrou Boileau.

(419)

An Noblañz n'en deo qet un dra dister, Dangeau,
Er poent ma ve quelet, gant ur vertus garo,
Eun den a voad strujus en anter-doueu
Oc'h heuill, evel a rez, rouden e gos tadou.

Mes n'alloin soufr ur sort, pini al lachentez
N'en deus nemet noblañz evit harpi en hon touez
It deus divergontet, gant merit ar re all,
D'en em bimpa hep mez, ha d'en em vrabançal.

Me supos en defe vaillantès e dud cos
Fournisset danvez caer evit ober mil gaus,
Hac en eus bet capet, vit honor o hano,
Gant teir fourdelizen alaouret o armo.

Petra servich dezàn un dastam ven a c'hloar,
Mar deo quir, deus an dud brudet var an douar,
Ne all disquez netra da zaoulagad ar bed
Nemet cos-parchimin espernet dre 'r preñved?
Davust ma zeo sortiet eus ar gaera mamen,
Mar ro gaou e gundu d'al lavarret sourcen,
Hac hep caout netra vras, nemet sot morganderz,
Mar cousq, digalonec, en didalvoudequez?

(420)

Gouscoude p'er gueler, faret a roquentez,
D'vauli al luquern eus e c'hinidiguez,
E ve credet an en respedus d'e lezen,
Ha na ve ganeme deus ar memes baguen.

Meo anezàn heprgen, e crede zotoni
Eo dleet dirazàn dont d'en em sujedi.
Ret eo din gouscoude, hep en espern netra,
Var e don re huel dont d'en interroja.

Lavarit, haros bras, speret huel meurbet,
Pere a brizer mui etouez an oll loënet?
Stad a rer eus ur marc'h gloriüs, calonec,

(421)

A zisque e vigour o terc'hel da reded ;
 Pini gemes na squiz, hac en daou c'hant placen
 A zo bet goloet eus henorus poultron ;
 Mes da Voyard memes eveler an nizet
 Guerzet en avantur, pa vent haridellet.
 Hep respect d'ar re gôs a voe deo tad ha mam,
 E renqont chareat ha bale dindan sam.
 Perac-ta c'hui deurvez, dre sotis, e trefet
 In respecti ennoc'h un henor zo collet ?
 Ne ven get brumennet o velet ur speç vên :
 Ar vertuz a noblañç a zo ar merç certen,
 Mar tennit anezi deus haroet brudet,
 Disquerzit an ardor en eus en he squeudet ;
 Carantez d'an henor, carsoni d'ar vigoñ.
 Leal oc'h-u atao ? Heuill 'rit al legennou ?
 Gout a rit coll repos, abalamour d'ar gloar,
 Ha quisset gant hernes, cousqet var an douar ?
 Moc'h enev evit nobl dre 'l lavaret merçou,
 Neuz deus eus a dud brudet dre 'n oll vroyou,
 Disqennet eus mil dad, hac ousten, mar qeret,
 O firchal cos titrou deus amzer dremenet ;
 Clasqet ar brezeller deus pini e tigen ;
 Choazet Lezar, Achil, Alexandr Macedoen.
 E vên contoler a deufe d'ho tamal,
 Ma n'en doc'h sortiet, e tlefac'h sortial.
 Mes deus Hercul memes hac e vec'h disqennet,
 Ma na veler ennoc'h nemet hoc'h izgledet ;
 An tadou, qen brudet, pe re zicriet oll
 N'en int en oc'h andret nemet testou control ;
 Hac al luquern vras-se deus o gloar dislivet,
 A zo eur squeud heqen evit hoc'h infamdet.
 E vên fier eus ar goad oc'h eus dishenoret,
 E cousqit en dis-est hanoyou respetet.
 Deus hanoyou re all e vên oc'h goloet,
 Se zo c'hoariellou d'am lagad, d'am speret.
 Ennoc'h ne velân tra nemet poeltron, tromper,
 Eur treitour, eur fallacr, eur zot, eur bavarder ;
 Eur foll a ya 'r gaouat qazi bete 'r furor,
 Hac eus ur vezen gaer ur brantq brein disenor.
 Re vuanec ezon.... hep douetanç va rimo
 A scuill calz a gomzou re dreing ha re c'huero :

(422)

Ret eo, gant ar re vras, caout un ton moderet.
 Ah! manafiq, ho coad a zo hanavezet.
 Pequeit so? respontit: aboue mil bloas fournis,
 O c'hallout er prouvi en urz vad hac en reiz.
 Le zo calz: goussoude ez eo sclër, ar proufion
 Deus amzer a goll tout eo quit a hanoyou.
 Deus titrou ho tud coz eo leun an oll levriou;
 Mes piou a brouvo din en un niver bloayou,
 D'o friejou brudet, ho mamou coz fidel
 Deus douzoni tromplu zo bet atao rebel?
 Ha penos e c'houzoc'h n'en deus den divezet
 E chaden ho tadou eur maill benac teuzet?
 P'en zo quir ho noblanq qercouly evel o goad
 A beurs mamou ennoc'h a zo bet douguet mad.

(423)

Milliquet ra vo 'n de ma teuas glorustet
 Deus bevidiquez vad da zouilli ar glandet!
 Ebars en amzer gos, pa voa yaouanq ar bed,
 Peb den a voa e c'hloar en e inoquantet;
 Dindan lezennou mad pepini a voa es;
 Milit a re 'n noblanq couly hac ar rouanes.
 Hac hep clasq an harpou hac ar c'hiniquetz vras,
 Amerzân e - unan haros hustr a dennas.
 Mes allas! dre 'n amzer, ar milit disteret,
 A vel an enor partabl hac an tech fall nobled;
 Hac orgouill un titr faus, harpet dre 'n insolantq,
 A vestroniach oll dindan hanv noblanq.
 Ac'hane a Duget, Baronet, Marquisien,
 N'o deuz evit vertuz nemet hanoyou ven.

(424)

Neuze voe gouelet tud fournus e rambrou,
 Oc'h invanti 'r blazon hac an armorion,
 Dre gomzou dientent ober langach a part,
 O crovi ar guerion a cimier, a ecart,
 A Bal, a gontrepal, lambec, fass pe facet,
 Hac an termenion alle o levr peur berniet.
 Eur follentez dispar, o veri ar rêzon,
 Enor, trist ha mezus, ne voe mui a sezou.
 Goude, evit souten ar renq vras eus an tiz,
 E voe laqet claustre piou a zispinje mui.
 O breina e peb lec'h pompus acipachou
 E voe hanavezet prinq ha duc dre 'n prachou.
 Prestic avoalc'h goude, noblanq evit beva,

(425)

O deus art d'ampresté, mes james da renta;
 Oc'h ober calz a fae eus serjant hac kucher,
 E lez en dienez ur paour-gër creancier;
 Mes dre zör e brison e vel ar marquis qër
 Coea lufr caer e dy dindan trégont proces.
 Ractal ar nobl morgant, hastet dre 17 dienes,
 A glasqas da bried pinvidig bourc'hisez;
 Euz hano precius gant adraficas;
 Goninat digalon e dud cöz a verzas;
 Hac en ur gorija ar fortun traitourez,
 E trapas e enor dre infamidiguez;
 Rac ma na ell an asur var ar goad luguermi,
 Al lufr caer eus ar renq a deuzo da fazi.
 Carantez ho tud cöz ennoc'h vo profidennou,
 Hac an oll evit car dezoc'h a renou.
 Mes un den pinvidig a dal atao e bris;
 Hac e ve bet goelet lazes e qër Paris,
 Demeus e voir hano mar manq tître pe vemor,
 E vo caret dezän cant tad-coz en histor.

(416)

Te, Dangeau, eus merit hac honorou quisquet,
 En eus a flatterez da vertu pur tennet;
 Te, fini er renq caer, galvet gant hon Roue,
 Er quel bender ornet demeus eur gloar nere,
 Ha dreizän e. unan avoalc'h steredennus,
 O tspirizout er pourpr rouane diegus;
 O tec'hel a vagder an douster importun,
 Ha dre gonsellou fur o sujedi 17 fortun;
 Dleour dezän heqen a honor meritet,
 E tiscoel d'ar bed oll penos ve gouarnet:
 Mar qerez n'eum visca deus eul lufr lejitim,
 Qé, dre gaer oberiou, da c'honit e istim;
 Servich eur mestr gen nobl, ha gra goelet bremän
 En deus c'hoas sujedet a zo dign anezän.

F. Guenveur.

(Vol. III, pages 419 - 426)